

**d'ar Yaou 18 a viz Gwengolo e Gwened,  
À l'aise Breizh Café, 20 h 30**

war-eeun war   
brezhoweb




**Evit ar wech kentañ e Breizh, hag e Bro-C'hall : klavisin war-eeun, e *prime time* war ar web, da geñver ar festival *Gwened e Breizh*.**

**Claude Nadeau**, plac'h ar c'hlav-kerdin, Arzourez pedet e Gwened, a vo e-kreiz ar jeu en abadenn WebNoz a vo signet d'an 18 a viz Gwengolo diouzh « À l'aise Breizh Café ».

Deus he c'harantez evit ar muzik klasel ha muzik Breizh e komzo, ha meur a don e sono deomp war-eeun dirak an dud bodet evit an degouezh.

Buhez sevenadurel Gwened a vo lakaet war-wel ivez e-kerzh an abadenn, ha kaoz a vo deus ar brezhoneg er c'helenn gant an tri doare skolioù. Dont a ray skolajidi da ginnig deoc'h al levrioù hag ar pladennoù o deus plijet dezhe. Ha souezhennoù all a vo e WebNoz an distro-skol !



« Wechoù 'mañ an houarnaj o tasoniñ a-unvan » emezont. Sapre programm ! An daou gomper Laors Skaveneg ha Loïc Delanoue (sakso ha gitar) a zegaso swing jazzy **Houarnaj** war ul leurenn espres-kaer...

**Kentañ WebTv 100% brezhoneg** eo brezhoweb. 35 eurvezh programmoù nevez a vez kinniget war ar chadenn bep bloaz : talk-shows, tresadennoù-bev, sitcoms, filmoù... Skoazellet eo brezhoweb gant Rannvro Breizh ha Kuzulioù-meur Penn-ar-Bed, Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan.

Ti-kêr Gwened a skoazelloù an abadenn-mañ skignet war-eeun diouzh Gwened.

War 3 lec'hienn e vo skignet an abadenn war-eeun : brezhoweb.com, surlaplace.tv, armor.tv.fr

**KASIT HO SOÑJ, HOC'H EVEZHIADENNOÙ DIOUZHTU WAR BREZHOWEB.COM !**

**le jeudi 18 septembre à Vannes  
À l'aise Breizh Café, 20 h 30**

en direct sur   
brehoweb




**Une première en France : du clavecin, en direct, en prime time sur internet, à Vannes, dans le cadre du festival *Gwened e Breizh*.**

La claveciniste **Claude Nadeau**, Artiste en Résidence à Vannes, sera l'invitée principale de l'émission WebNoz, le jeudi 18 septembre à 20h30, depuis « À l'aise Breizh Café ».

Elle évoquera son amour pour la musique classique et la musique bretonne et interprétera plusieurs morceaux en direct et en public.

Cette émission mettra également en valeur les associations qui travaillent pour la promotion de la langue bretonne à Vannes. De jeunes collégiens assureront la présentation de la rubrique « livres-CD-DVD ». Et WebNoz réservera encore bien d'autres surprises pour son émission de rentrée !



« Il y a des ferrailles qui s'accordent » nous disent-ils pour se présenter. Tout un programme ! Le duo Laors Skaveneg et Loïc Delanoue (saxophone et guitare) nous apporteront le swing jazzy de **Houarnaj** sur un plateau dédié...

Brehoweb est **la première WebTv 100% en langue bretonne**. Elle propose 35 heures de programmes frais par an : talk-shows, dessins animés, sitcoms, films... Brehoweb est soutenue par la Région Bretagne et les Conseils Généraux du Finistère, des Côtes-d'Armor et du Morbihan.

Cette émission en direct de Vannes bénéficiera également du soutien de la ville de Vannes.

L'émission sera diffusée lors du direct sur 3 sites : [brehoweb.com](http://brehoweb.com), [surlaplace.tv](http://surlaplace.tv), [armortv.fr](http://armortv.fr)

**ENVOYEZ-NOUS VOS COMMENTAIRES TOUT DE SUITE SUR BREHOWEB.COM !**